

Dont a ra tudou yaouank war hentou Breiz-Izel
 Digoret o dsoulagad ,ha desket ar gentel
 Nann n'int ket chomet bouzar ouz mouez o Zadou koz
 Dihunet-krenn'maint breman ,deiz eo war-lerc'h an noz

II

Hon Tadou o deus sujet,skuiz-faez o brezelia
 Ha d'o heul er c'hantvedou kabestret ni a ya
 Re bounner war hon diskoaz eo yeo an estren griz
 Nann n'omp ket mui'vit soubla rak e lezennou striz

III

Na liger e sko hon treid war zouar hor bro-ni
 Ni eo a zo perc'henned,gwir mistri en o zi
 Ha ken frank hag an avel ,ni afell d'imp beva
 Eur mouc'hoarz war hor muzell, o stourmi'n eur gana

IV

Mar teu d'hor breudeur karet,kouerien en ho parkou
 Hor gwelout war ar bale hed-ha-hed an hentou
 Ra saludient ec'hanomp eur respont int o do
 Salv ma teufent da gompren emsomp a-du ganto